


# SPERED ha BOUD

gant T. Pol Rolland-Gwalc'h, ofm

diwar Nikolai Berdiaeff



Kaier 26

Eost 1961

# SPERED ha BOUD

gant T. Pol Rolland-Gwalc'h, ofm  
diwar Nikolai Berdiaeff

Kaier 26

Eost 1961

E - G I Z R A K S K R I D .....

e kinnigomp d'hol lennerien ur pennad tennet  
eus al lizher a gase dimp an troour en ur ser  
gant e destenn :

Keneil ker,

A-benn an diwezh e kasan deoc'h an droidigezh hir-c'hortozet.  
Adaozet em eus an derou anezhi. Hec'h adlennet em eus en he fezh meur a  
wezh. Koulskoude, n'oun ket c'hoazh laouen ganti.

Dek vloaz 'zo bremañ ez eo bet savet an droidigezh-se. N'em  
eus ket ehanet a studiañ Berdiaeff abaoe : war a gredan, ez oun aet doun  
a-walc'h en e venozioù. Rak-se e welan mat ha re-vat sioù fall ar pajennoù  
a vezo kinniget da lennerien "PREDER". Digarez a c'houlennan diganto. Ur  
wezh all e vo graet gwelloc'h.

Tad Pol a Leon, o.f.m.

Douget eur da nac'hañ e vefe ez-wir eus ar Spered. Ne ziskreder ket diouzh an traoù a weler, rediet ma 'z eur ganto da anzav o gwirvoudegezh. Ar Spered avat n'eo ket un dra a weler, da vihanañ ne deo ket un diavaez-tra e-touez traoù all. N'eus den evelato - hag an danvezelour kaletañ e vefe -- a gement a nac'hfe d'ar Spered un doare gwirvoudegezh, difetisoc'h ar framm anezhi. Se 'zo ret, rak e pep hini ac'hanomp emañ 'r Spered, zoken en hini a lavar n'eus ket anezhañ. An taol-mañ, koulskoude, ar Spered ne vez sellet outañ nemet evel ouzh un arzarv oudenn eus an Danvez, evel ouzh frouezh un heuliad

---

1.- Nikolai Berdiaeff : SPERED HA GWIRVOUD, pennad I : Gwir-  
voudegezh ar Spered, 1. Spered ha Boud.

luskadoù danvezel. Met diveizus-kaer e vanas bepred ur seurt lavar. Bewezh m'emañ'n danvezelour o nac'h-añ 'r Spered, ne ra nemet kammañ 'r pezh a zo diskuliet gant an arnoderezh, ha ken diwiniñ eo hag an daltoniad o komz diwar-benn al livioù. En em zistrobañ 'ra 'n danvezelour dre lakaat war anv an Danvez holl berzhioù ar Spered : poell, fênkiz, oberiantiz. Re-all e-touez ar skolioù-prederiañ, tanavoc'h o c'hizidigezh, a vez kemeret ar Spered ganto n'eo ket da arzarvoudenn an Danvez, hogen da arzarvoudenn ar Vuhez, war gont hournezh nerzhioù-krouiñ diheskus. 'Val-se 'vez menoziet ar Spered gant ar Vuhezourion. En em ouestlañ 'ra skolioù ar Speredelourion da harpañ gwirvoudegezh ar Spered. Peurvuiañ e vez menoziet ar Spered gant ar Speredelourion evel un darc'hvoudenn, evel ur wirvoudenn diforc'het ez-doarek diouzh traizoù all ar bed anienel, daoust ma'z eo a-neuz ganto. Anienekaet eo bet alies ar Spered gant ar meizerezh prederouriezhel, kludet ma veze gantañ war an derez uhelañ, en urzhaz didrouc'h traizoù ar bed rakvoudel. Daoust ma veze anzavet dezhañ un dalvoudegezh uheloc'h, menoziet eo bet c'hoazh ar Spered evel rakvoud : a-ouenn eo ar wirvoudegezh anzavet dezhañ gant gwirvoudegezh traizoù an diavaez-bed. Hogen, hag-añ e c'heller merzañ gwirvoudegezh ar Spered hag he diskouez anat, ma ne waler ennañ nemet ur wirvoudenn vedel a-neuz gant ar gwirvoudennoù all ? Aze 'mañ 'n dalc'h. Kenster an eil gant eben e teu gwirvoudegezh ha rakvoudegezh da vezañ, gant kement prederouriezh douget da ober un diavaez-tra hag un "hypostasis" diouzh ar meizerezh. En enep, didalvezet e vez ar Spered betek bezañ ur stad enboudel eus ene Mabden,

gant kement hini a nac'h an darc'hvoudegezh anezhañ. Diziforc'h e chom an darvoudennoù speredel evel-se diouzh an darvoudennoù enevel, a reer anezho darvoudennoù enboudel peurvuiañ. Rak-se emañ harperien ar Spered e chal da ziskouez rakvoudegezh an darvoudennoù speredel. Diogeliañ 'ra 'r voundoniezh speredel-ourez : ar Spered a zo ar Boud gwirion, darc'hvoud ar Boud; en abeg da se, Boud ha Boud rakvoudek ez eo ar Spered.

Patra eo ar Boud, avat? Hounnezh eo kudenn ziazez ar brederouriezh. Gant ar ger "Boud" e reomp peurvuiañ evel pa vije sklaer-anat, hep goulenn erbet war e zivout. Nemet en em c'houlenn a ra Barnerezh an Anaoudegezh pegait ez a frouezh hor meizerezh d'en em strolleañ ouzh ar pezh a anvomp "Boud", pegait e vez aozet - gant an enboud oberiant - ar "Boud"-se a sellomp outañ a-c'houdevezh evel ouzh un eienenn. Henezh eo bet pennañ labour Kant a ranker gwennañ e vrud en un doare nevez-flamm. Mogidellat eo bet dellidoù peurbadus o mestr gant an nevez-kantourion a zisleberas e gelannadur. Kant n'oa ket anezhañ ur C'healour, e ster-washaat ar ger : d'ar wirvoudegezh edo o vont. E (meizerezh) Kant e kaver mein diazez an Usvedoniezh wirion nemeti : an DAQUEGEZH OC'H ENEBIN KELC'H AR FRANKIZ DUZH KELC'H AN ANIEN KENETREZD, ar VENNEGOURIEZH, an DIREDI (ar veizusted), ar BERSONELOURIEZH, ar c'halannadur diwar-benn an ENEBADENNOU ( : an Enebadoniezh), an ASANT D'UR GWIRVOUD REISHOC'H KUZHET GANT BED AN DARVOUDENNOU GWELUS. Re vuan ez eus usvedonourion alaman an XIXet kantved o ternaouiñ, Fichte, Schelling

ha Hegel, pa rejont o menoz mont dreist daouegouriezh Kant a drugarez da genac zadurioù unvezhel. E daouegouriezh Kant ez eus ur wirionez padusoc'h eget an unvezhouriezh hag a zo bet ganet gant ur meizerezh ijinnet-draist - ur meizerezh, avat, oc'h en em rakvoudekaat hag oc'h en em "hypostasiekaat". Re dechet eo an Usvedoniezh da "hypostasiekaat" ar menozioù; kemeret e vez ar Menoziad evit ar Boud ganti, ha menoziet e vez ar Boud hervez he meizerezh. EMAN 'R VOUDONIEZH O KLASK UR BOUD A VEFE RAKVOUDEK, HAG AR BOUD KAVADENNET GANTI N'EO NEMET HE MENOZIADOU RAKVOUDEKAET. Gant ar Voudoniezh ne vez tizhet evel-se nemet ur boud hag a zo frouezh ar meizerezh hag ar striv poëllataer. DISLEBERET GANT AN ANIENOURIEZH e hafval bezañ pep usvedoniezh oc'h ober gant ar stur-ienn voudoniezhel. "Anienouriezhel" a ran eus kement usvedoniezh a sell ouzh ar Boud evel ouzh ar Rakkvoud un "Anien", ha pa vefe anv a Anien speredel. Daoust ma kilas e-unan dirak an hent-se, a-drugarez da g-Kant eo e c'helljed TIZHOUT UR WELEDIGEZH VEZANTELEUS AR BREDEROURIEZH O TREMEN DREIST AN ANIENOURIEZH.

Intrèt-doun eo bet Kealouriezh Alaman an XIXet kantved o teraouif gant ar burutallerezh kantel : ne c'hell ket distreiñ d'un usvedoniezh diogelourez, anienourez, rak-kantel; diwar an Enboud e stag da sevel, hag a-dreuz an Enboud e fell dezhi dizoleif kevrin ar Boud. Hogen, dihentet ma'z eo gant un doug d'an unvezhouriezh ha d'an emdroouriezh, e kemer an usvedoniezh alaman Spered hag Anien da hafval-tra, ha kredif a ra en ur Spered rakkvoudek.

Gant Hegel ez eus un heverk a boelloniezh diwar-benn ar Boud : sellout a ra outañ evel ouzh unan eus ar menozioù difetisañ, eus ar re c'houlonderetañ a bep talvoudegezh : e lakaat a ra a-ster gant "nannvoud". Ar boelloniezh-se - hag a lakas anezhañ war hent an Dont-da-vezañ, war hent ar Spered Hollek oc'h en em dreiñ - gelllet he dije e gas da glozadennoù dishefvel a-grenn. Gant ar Gealouriezh Alaman n'eus dael erbet a-zivout Mabden hag ar Berson, hag a zo aberzhat d'ar Spered hollek, dibersonel. Evel gant ar brederouriezh hellenat - war un dachenn dishefvel avat - trec'h eo bet an Holleg, ar Boutin, war an hinienn, an Di-eil, war ar Bezant gwirion. Prederouriezh ar Boud rakkvoudek eo deuet Prederouriezh ar Spered da vezañ. Menoziad poellekaet ar Boud n'eo ket bet diskaret e vali. En ur mod bennak, ha daoust d'e brederouriezh bezañ stennet-kanaf, e c'heller lavarout ez eas Schopenhauer gant un hent reishoc'h. Da gentañ-holl ec'h anavez ar menoziadur ar Boud diouzh ma'z eo enebet da venoziadurezh ar rakkvoudegour hag an anienour. Tostaat a reas Fichte ouzh ar vezantelouriezh pa savas e gelennadur diwar-benn Ober-Kant ar Ma, met, a-hand-all, e talc'has da vezañ hollegour hag enep-personeloue. E gwirionez, ne deo ket dre sellout pizh ouzh ar rakkvoud, ouzh an dra, e c'heller dizoleif kevrin ar wirvoudegezh - dre lakaat an enboud da brederiañ war e obererezh dezhañ e-unan na lavaren ket.

Kajañ 'reomp evel-se gant ar gudenn-mañ :  
HA LAKAAT A C'HELLER DA DALVEZOUT EVIT AR SPERED,  
EVIT DOUE, PENNENOZIAD AR BOUD A ZO BET DANZEET

GANT AR MEIZEREZH O POELLATA ? An Douaroniezh  
kevrenel apofatek ne vez ket anzavet ganti e c'hell-  
fed lakaat pennvenoziad ar Boud da dalvezout evit  
Doue; gant Doue e ra an DREIST-VOUD ha zoken un  
NANN-VOUD. Ret ober evel-han, en un doare disheñvel  
avat, da venoziañ ar c'helc'h speredel ez-preder-  
ouriezh. Ar Spered n'eo ket ur wirvoudenn-zirak; en  
tu-hont da se, n'emañ ket e kelc'h ar Boud, avel  
pennvenoziad poellekaet. Neblec'h na morse ne deo ar  
Spered 'ur Rakkvoud gwirion. Praderouriezh ar Spered  
ne deo ket ur "Praderouriezh-ar-Boud", ur Voudoniezh,  
hogen ur "Praderouriezh-ar-Bezañ". Gwirvoud eo ar  
Spered, disheñvel avat dicuzh gwirvoudegezh ar bed  
anienel, dicuzh gwirvoudegezh an traezoù; ar ger  
"gwirvoudegezh" en deus amañ ur ster disheñvel penn-  
da-bann. Oc'h ober gant geriadur Kant, daoust ma ne  
reaz ket gant ar ger "Spered", e c'hellfed lavarout:  
GWIRVOUDEGEZH-FRANKIZ EO GWIRVOUDEGEZH AR SPERED HA  
N'EO KET GWIRVOUDEGEZH-ANIEN. AR SPERED N'EO MORSE  
RAKVOUD. Gwirvoudegezh ar Spered n'eo ket hini ar  
Rakkvoud. N'eus rakkvoud ebet, n'eus gwirvoudenn rak-  
voudek ar bed-mañ e reomp bed rakkvoudek anezhañ, e  
gement a c'hellfe bezañ anvet "Spered". Setu perak e  
c'heller ken aes nac'hañ gwirvoudegezh ar Spered,  
SPERED EO DOUE; rak-se NE DEO KET DIAVAEZ-TRA.  
ENBOUD EO DOUE. Gloev lenner han dislavaro. Heñvel  
gant ar Spered. En Enboud e tizober ar Spered, ha  
n'eo ket en Diavaez-tra. Er rakkvoud ne c'heller  
dizoleiñ nemet rakkvoudekadur ar Spered. Kelc'h a vo  
e gement-se en ur pennad all. Er Rakkvoud avat n'emañ  
ket ar Spered; emañ en Enboud hepken. N'eus nemet en  
Enboud a gement a vefe bezantel. AN ENBOUD HEPKEN A  
VEZ O VEZAN DIOUTAN E-UNAN. Frouezh an Enboud eo ar

Rakkvoud. En enep, krouadur Doue eo an Enboud, rak-se  
e-stivell ez eus anezhañ. An Enboud n'eo frouezh ar  
meizerezh nemet e kement ha ma'z eo anebet ouzh ar  
Rakkvoud - hag hennezh ne c'heller e vezata nemet pa  
vez keñveriet, ha morse en e zerc'hvoud. Hogen ar-  
maez enebadur poellek an Enboud ouzh ar Rakkvoud emañ  
'r Speredelezh c'hlan. Kenkouz, AR SPERED N'EO KET  
ENBOUDEL, e gwirionez al lavar, daoust m'emañ en  
Enboud hepken, ha tamm ebet er Rakkvoud. E mod ebet  
ne deo enboudel e ster enevoniezhel ar ger hag a  
c'houlenn ur rakkvoudegezh lakast e-keñver. Gwirvoud-  
egezh ar Spered n'eo ket hini ar rakkvoudennou, an  
traezoù; disheñvel-krann ha doare; ur wirvoudegezh  
knlz uheloc'h ez eo hag eieneloc'h-dispar.

Arabat kredañ, daoust da se, e vefemp e  
soñj prezeg amañ evit ur speredalouriezh difetig A  
VIJE ENEBET AR SPERED GANTI OUZH GWIRVOUDEGEZHIOU AN  
ENE HAG AR C'HORF : ar speredemouriezh-se, dalc'het  
ma vije ar gwirvoudegezhioù enevel ha korfel ganti  
dindan veli-mestroniañ-pe-nac'hañ ar Spered - lakaat  
'rafe ar Spered war an hevelap derez a wirvoudegezh.  
E gwirionez, tennañ 'ra ar Spered d'un doare-bezañ  
disheñvel, uheloc'h eget hini an ene hag ar c'horf:  
TEIRANNADUR AN DEN EN BOUD SPEREDEL, ENEVEL HA  
KORFEL WAR-UN-DRO, ez eo peurbadus e dalvoudegezh :  
dellezout a ra bezañ miret. Se na dalvez ket kement  
hag anzav e vije en Mabden, kouz lavaret, un natur  
speredel e-kichen e natur enevel hag e natur korfel.  
Se e dalvez kement ha disklariañ E C'HELL ENE HA  
KORF MABDEN SEVEL BETEK EN UR C'HELLOU ARALL, UHEL-  
OC'H, EN KELC'H AR VEZANS SPEREDEL - e c'hell Mabden

treizhañ eus kelc'h an Anien betek en Kelc'h ar Frankiz, en Rouantelezh an Talvoud; eus kelc'h an Dizunvaniezh hag an Drougiezh betek en kelc'h ar Garantez hag an Unvaniezh. BOUD SPEREDEL ED MABDEN, neizh speredel dezhañ : N'EN DEUS KET, avat, UN NATUR SPEREDEL RAKVOUDEK o vont en arbenn d'e natur enevel ha d'e natur korfel. KORF MABDEN A C'HELL IVEZ BEZAN KEVRANN ER SPERED - a c'hell ivez bezañ speredel. Ar pennelfenn speredel ne deo ket ur pennelfenn rakvoudek. "Bezañ rakvoud" a dalvez koment ha "Bezañ evit an Enboud", peogwir ne c'hell ar Rakvoud bezañ gwelet rakvoud, nemet gant un Enboud e vefe. En un doare disheñvel-kenañ e vez ganet gwirvoudegezh ar Spered : sevel eus ar Rakvoud ne ra ket. Dont a ra EUS DOUE HAG A ZO ENBOUD. Va arnodadurezh speredel diabarzh n'eo ket ur rakvoudenn. NE C'HELLAN KET BEZAN RAKVOUD DIRAZON-ME. Enboud n'eo ket derc'hvoud ( ur pennveneziad anienouriezhel eo an derc'hvoudegezh ) : OBER ED AN ENBOUD. Ur c'helc'h a-ziaoc'h d'an diforc'h ha d'an enebadur "Meizerezh-Boud" ez eo ar Spered; ennañ ne vez ket rakvoudekaet ar meizerezh, nag hypostasiekaet. Gwirionez an ene ez eo ar Spered, hag e dalvoudegezh hollbad. Mozet evel-se en froud an Dalvoudegezh, e c'hounez ar Spered un neuz talvoudoniezhel. An doare pennañ ez eo ar Speredelezh, un Talvoud eo, uhelañ pal a c'hell bezañ tizhet gant Mabden. Gant ar Spered e vez roet he ster d'ar Wirvoudegezh ; ar Spered n'eo ket ur wirvoudegezh arall. Heñvel eo ar Spered ouzh c'hwez Doue o trebarzhiañ Mabden hag o reiñ dezhañ an dellid uhelañ, doare pennañ e vezañs : AN DIZALC'HE-ENTEZH HAG AN ÛNVEZH DIABARZH. Menozadur rakvoudel ar wirvoudegezh speredel hon laka d'an em c'houlenn

daoust pe klotañ 'ra hon stadoù-spered gant ur wirvoudegezh wirion, pe ned int nemet ur stad eus an Enboud. Met dre fazi hepmuiken eo e stigner ar gudenn er mod-se, kamm-venoziet ma vez an dezempred "Enboud-Rakvoud", evel pa vije rediet an Enboud da velezourañ n'ouzon dare peseurt rakvoudennoù. En GWIRIONEZ, AR STADOU SPEREDEL NE GLOTONT GANT TRA ERBET : BEZ' EZ EUS ANEZH. INT A ZO AR GWIRVOUD KENT. Bezantoc'h int eget kement dassked a zo er bed Rakvoudek.

Da resisaat Gwirvoudegezh ar Spered hag ar wirvoudegezh dre-vras, e ranker da gentañ diskoulmañ kudann an DAREMPREDOU 'TRE MEIZEREZH HA BOUD. Daou venoziadur klasel a zo : Gwirvoudegouriezh ha Kealouriezh. Stumm klasel ar Wirvoudegouriezh eo ar Skolastik, an d-Tomasiadegezh. Gwirvoudegouriezh an XIXvet hag an XXvet kantved zoken, n'eus anezhi nemet ur wirvoudegouriezh kammet ha disteraet. A-ratozh-kaer en em zisklêr ar wirvoudegouriezh tomasiat evel ur wirvoudegouriezh diwidre : 'vern penaos, ne fell ket dezhi burutellañ an Anavezout. En enep, gant Burutellerezh an Anavezout e vez diskuliet oberiantiz an Enboud, penaos e vez menoziet hag anavezat ar Bed gantañ; fallout a ra d'ar burutellerezh-se resisaat petra 'vez degaset gant meizerezh an Enboud da vezadur ar Rakvoud. Diskouez a ra deomp an Enboud o lakaat war anv ar Rakvoud ur wirvoudegezh hag a zo bet aozet gantañ e-unan, da lavarout eo e tiskouez deomp penaos e vez rakvoudekaet frouezh ar meizerezh. E gin da se, rediet e vez pep gwirvoudegouriezh veizel, emskiantek ha

burutellourez, da anzav e chom an Enboud disoberiant  
a-grenn. Koulskoude, morse ne gomprenar penaos e  
c'hellfe ar Rakvoud mont da Enboud, e c'hellfe dont  
da vezañ un degouezh meizel hag anavezel. A-hend-all,  
dre c'haou eo ec'h anzaver d'ac'h froud hepken en  
Anavezoniezh - ar Wirvoudegouriezh o kelenn e vije  
doareet en holl d'an holl meizerezh hag anavezerezh  
gant ar Rakvoud e kement ha ma raer "Gwirvoudenn  
reizh" anezhañ - hag ar Gealouriezh a vez sellet  
ouzh ar bed ganti evel ouzh un dra krouet gant an  
Enboud. N'EO KET TONKET DEOMP DIGAB PE GWIRVOUDEG-  
OURIEZH PE KEALOURIEZH, an eil hag eben disklæriet  
evel m'emaomp o paouez hen ober: UN TREDE HENT A ZO,  
hag a hafval deomp bazañ an hent gwirion nemetañ.  
Tra m'emañ 'r Wirvoudegourion o pismigañ 'r Gealour-  
iezh hag o vreaataat evit Predeouriezh ar Rakvoud,  
ankounac'haat a reont kement-mañ : OBEREREZH AN  
ENBOUD N'EO KET TRA-UNAN-HAG-HENVEL GANT AR MEIZ-  
EREZH; KEVRANN ER BOUD EO AN ENBOUD E-UNAN, pezh a  
dalvez kement ha lavarout ez eo BEZANTEL, KEN E  
C'HELLER DIFAZI TIZHOUT AR GWIRVOUD A-DREUZ BEZANT-  
ELEZH AN ENBOUD EEUN-HAG-EEUN. Evel-se n'euz ket  
rediet da zibab unan a zaou : pe anzav, evel gwir-  
voud reizh, ar Rakvoud ma vije trebarzhot an anav-  
ezer gantañ eus an diavaez - pe nac'hañ krenn-ha-  
krak ar Gwirvoud dre zielfennañ anezhañ etre santad-  
annoù ha menoziadoù krouet gant an Enboud. Ma kerer  
ober gant ar ger-se, BOUD EO AN ENBOUD E-UNAN : AR  
BOUD REIZH NEMETAN EO BOUD AN ENBOUD.

An Enboud n'eo ket meizerezh hepken :  
MENNEREZH HA BEZANS ez eo war un dro. EN ANAVEZOUT  
E VEZ GRAET KALZ GANT AR MENNEREZH. N'eo ket gwir e  
vije krouet ar Bed gant an Enboud. Gant Doue e vez  
krouet ar Bed. Ne deo ket rakvoudennoù, tresañ a  
vez krouet gant Doue; 'ENBOUDENNOU BEV HA KROUANT ne  
lavarar ket. N'EMAN KET AN ENBOUD O KROUIN AR BED,  
HOGEN DA GROUIN ER BED EZ EO GALVET. Ar Gwirvoud,  
kemeret en e ster reizh ne vez ket krouet gant an  
anavezerezh; hogen UN OBER KROUANT EO AN ANAVEZEREZH.  
Evel-se diouzh anavezerezh an Enboud emañ Gwirvoud-  
egezh ar Rakvoud, tra m'emañ 'n anavezerezh-se di-  
ouzh gwirvoudegezh an Enboud, diouzh e vezantelezh.  
Diouzh m'emañ an anavezer evel-se pe evel-hen, ha  
diouzh an darempredoù skoulmet gant an dud atrezo,  
emañ 'n Anavezad; pezh a dalvez kement hag anzav ez  
eus ur blez kevredel gant an Anavezout. Met, anv a  
zo a zisklaeriañ petra 'vez degaset d'an Anaoudegezh  
gant an Enboud krouer. E gwirionez, nac'het e vez  
gant ar Gealouriezh enboudel hag ar Gealouriezh rik,  
e vije Mabden o krouiñ tra, p'emañ oc'h anavezout.  
Anzav a reont svelato a vez krouet ar Bed gant an  
Enboud; hogen an Enboud-se n'eo ket Mabden; un  
Emskiant droistel ez eo, un Emskiant boutin, un  
Enboud droist-personel, ur spored dizalc'h. Er bed-  
mañ krouet gant an Enboud, n'euz lec'h abet evit  
krouerezh Mabden. Dre fazi eo e striver da enkaf 'r  
Gwirvoud e-barzh ar Rakvoud, er pezh a zaver eus ar  
Rakvoud. Bez' ez eus ur Wirvoudegezh-an-Enboud, stag  
ouzh Bezantelezh an Enboud. An Anaoudegezh n'eo ket  
un darempred etre meizerezh ha Boud, rak en em lekaat  
a rafe neuze direk ar Boud, evel pa ne vije ket ur  
boud anezhi hac'h-unan. DARVOUD EBARZH AR BOUD EO

KENTOC'H AN ANAGUDEGEZH, HAG ENNI E TIZOLOER KEVRIN  
AR BOUD. Nemet ez eo ur Boud ne voe ket gwasket gant  
ar rakvoudekaat, ur Boud na daolar ket d'an diavaez.  
AR SPERED A ZO ANEZHAN UR GWIRVOUD A ZIZOLOER E-  
BARZH HAG A-DREUZ AN ENBOUD BEZANTEL, UR GWIRVOUD O  
TARZHAN EUS AN DIABARZH, ha n'eo ket eus an diavaez,  
eus ar bed rakvoudekaat. An Enboud eo a vez o krouif  
ar Rekvoud, dre rakvoudekaat frouezh ar Spered, dre  
hypostasiekaat ar menoziedoù ; met diskouez e ra  
kement-se ez eo dizeriet an Enboud, ez eo digenvez  
e-keñver an Enboudoù arall, EZ EUS DROUKRAÑS ETRE AN  
ENBOUD, AN ENBOUDOÙ ARALL HAG AR BED DOUEEL - AR  
KHOSMOS. Obererezh an Enboud ez eus gantañ ur ster  
dishefvel amañ en holl d'an holl diouzh an hini  
a vez roet dezhañ gant ar Gealouriezh. Ar Wirvoudeg-  
ouriezh poellourez ha skolastik, ez eus anezhi un  
Anavezoniezh "eus-ar-gwallañ-ez-a'r bed", hag a chom  
hep teurel evezh a-walc'h ouzh diskar Mabden, ouzh  
an droukrañs a zo etrezhañ hag ar Bed. Hogen ar Spered  
eo, dres, a drec'h war an diskar hag an droukrañs-se.  
Kejañ reer endro evelse - dindan ur sklerijenn  
nevez, dishefvel diouzh hini ar Blatoniadeg hag ar  
Skolastiked krennamzeriat - gant ur c'hozh kudenn a  
chelas ar wirvoudegourion : HA GWIRVOUDEK EO AN  
HOLLEGOÙ ? Staget eo an div gudenn an eil ouzh eben  
rak tremen a ra Gwirvoudegouriezh ar menoziedoù hep  
sellout ouzh ar pezh a zo degaset gant ar meizerazh  
oberiant, gant an Enboud, da lavarout eo ne vez ket  
dalc'het kont ganti eus ar rakvoudekaat. Met, hen  
gwelout a raimp, mar deo diwir e vez kinniget deomp  
da zibab pe Gwirvoudegouriezh pe Kealouriezh, ken  
diwir-all eo e vije ret deomp diuz pe Gwirvoudegour-  
iezh pe Anvelouriezh.

Kalz tostoc'h eo Gwirvoudegouriezh an di-  
avaez-traoù da Wirvoudegouriezh ar menoziedoù eget  
ma kred peurliesañ da istorourion ar Bradarouriezh.  
Gwirvoudegouriezh ar Spered n'eo ket Gwirvoudegour-  
iezh ar Rakvoud. Met, Gwirvoudegouriezh ar Spered,  
daoust hag heñveloc'h tra e vije gant Gwirvoudegour-  
iezh an Hollegoù, Gwirvoudegouriezh ar Boutin ?  
A-hed istor ar menoziad "Spered", bras ar roll a zo  
bet c'hoarizet gant ar Speredelezh evel holl-sturienn  
da Vuhez Mabden en he fezh, hag enebet aval-se ouzh  
kement 'zo prevez hag hiniennek. Dindan ar bed ez  
eus bet falteziet Kealioù da ziazez, hollek an neuz  
anezho; ha setu diazez speredel ar Bed (eo a glaver  
gant Keal-Wirvoudegouriezh N. Lossky ha S. Frank,  
kenkouls ha gant ar Furnezoniezh\*). Ar gredenn-se  
emañ he hadenn e ( kelennadur ) Platon, gant un hent  
eus ar seurd ez eer a-walc'h da hypostasiekaat  
menoziedoù difetis, da rakvoudekaat frouezh ar meiz-  
erezh. Diazez kealek, speredel ar Bed, a zo anezhañ,  
da gantañ-holl, ar "rakvoudegezh" a ziforc'her di-  
ouzh an Enboudgezh, diouzh kement a zo prevez, hi-  
niennek. Degouezhout a reer evel-se gant ur menoz-  
iadur a'r Spered hag a zo kontrol d'ar menoziadur  
bezantel: (da lavarout eo) gant ar spered rakvoudek,  
hollek, an diazez n'eus nemetañ a gement a refe o  
zalvoudegezh d'an Hollegoù gwitibunan. E gwirionez,  
ret e vefe disklariañ 'r Spered evel ar pezh a zo  
kontrol da gement 'zo boutin, rakvoudek, dibersonel.  
Talvezout a ra "Gwirvoudegezh an Hollegoù" kement  
ha Gwirvoudegezh ar Boutin, an Difetis - merkañ 'ra  
e kaver en traoù ar pezh a ziogeter gant menoziedoù  
hollek o ster. Frouezh ar Rakvoudekaat eo Gwirvoud-  
egezh an Hollegoù; arabat neuze sellout outi evel

ouzh ur wirvoudenn eienel. Bezental eo pep gwirvoud-  
enn eienel ; an Hollegoù avat, n'eus ket anezho.  
Hogen UR FAZI EO KEMER DA HENVEL TRA PEZH 'ZO BOUTIN  
HA PEZH 'ZO HOLLEK. Difetis eo pezh 'zo boutin; eus  
ar meizerezh difetis ez eo difluket. Fetis eo pezh  
'zo hollek, e gwirionez ar ger ; talvezout a ra  
kement ha leunded, pinvidigezh, ha tamm erbat kement  
ha paourentez an difetisaerezh. Ouzh an dra-se ne  
selljed ket a-walc'h, pan edo Gwirvoudegourion hag  
Anvelourion o tabutal etrezo. Gwirvoudegouriezh hag  
Anvelouriezh n'int ket enebet-rik an eil ouzh eben,  
pa n'eus anezho nemet an dacu benn-sheil ag an di-  
fetisaat. E gwirionez, an Anvelouriezh ne c'hell ket  
kregif a gwirvoudegezh an traoù hiniennel, personel,  
fetis, ret dezhi kenderc'hel gant an disrannañ betek  
an didermen: n'eo ket gouest da dizhout ar Gwirvoud,  
an Didrouc'h. Ken difetis an eil hag eben eo Gwir-  
voudegouriezh hag Anvelouriezh; ne verzont gwirvoud-  
enn fetis erbet, na war an dachenn hollek, na war an  
dachenn hiniennel. REDIET EO GWIRVOUDEGOURIEZH AN  
HOLLEGOU DA ANZAV NED EUS BOUD PREVEZ ERBET, HINIENN  
ERBET, ERMAEZ AR RUMMADOU - emañ prevezenn hag  
hinienn gwirziennet doun er rumm-voud. Eilzerez eo  
neuze prevezenn hag hinienn; (gwirvoudennoù) deveret  
ma 'z int, n'eus ket ez-diaub anezho. Ar Blatoniad-  
egezh a zo anezhi ur Brederouriezh-ar-Rummvoud hag a  
zo divarrek da stignañ kudann an hiniennelezh. Ken  
divarrek-all eo an Anvelouriezh da anzav dizalc'h-  
antez, unvezh hag eienelezh an hinienn ; c'hwitaf  
'ra, kenkoulz, direk kudann ar bersonelezh, rak en  
em goll a ra an didermen, dre forzh disrannañ-di-  
strilhañ.

Peurvuiañ e harper an Hollegouriezh veizal  
da zero'hel digor an hent d'ar Gouzout hag a zo bet  
diverket gant direllerezh an Anvelourion hag an  
Arnodelourion. Mat un touell n'eo ken. Hiniennel ha  
dreist-poell eo ar Gwirvoud, komzomp resis, ar Gwir-  
voud eienel ha didrouc'h, an hini ez eus evit gwir  
anezhañ. Dre ma ne bled nemet gant ar Boutin, ne  
c'hell ket an Hollegouriezh veizal splujañ er Gwir-  
voud-se. Ur boutinañ, un distrihlenn eo ar menoziad.  
Mat pezh a venn Maden anavezout, an hinienn fetis  
hag an holleg fetis an hini eo, tamm erbet an Holleg  
distrihet. Ne c'hell ket avat dont a-benn eus e  
daol, en ur vont gant an Hollegouriezh veizal, gant  
anaoudegezh difetis ha menoziadel ar rakvoudennoù.  
Hounnezh eo, dres, reuziegezh an Anvezout, e ouezas  
Kent he diskouez deomp gwelloc'h eget nikun. Gant ar  
Brederouriezh Alaman ez eus bet graet kalz evit  
stignañ kudann an (alfennoù) dreist-poell an Anaoude-  
egezh. HA GQUEST EO AR POELL DA ANAVEZOUT PEZH 'ZO  
DREIST-POELL ? Bez' ez eus un anavezerezh na grog  
ket en traezoù a-drugarez da venoziadoù diazezet war  
hollsturiennnoù : splujañ 'ra an anavezerezh e-barzh  
ar Vezañs, e-barzh ar Gwirvoud fetis; kevrañ eo er  
Boud; ha gantañ eo sklaerijannet ar Vuhez. Eval-se  
hepken e c'haller anavezout ar Spered, hag a zo  
difetis bepred. EMAN 'R SPERED EN TU-HONT DA ENEB-  
ADUR AR BOUTIN HAG AR RUMMAD OUZH AR BREVEZENN HAG  
AN HINIENN ; ENEBADUR ma save diwarnañ ar randañ  
etre Anvelourion ha Gwirvoudegourion.

An Anaoudegezh a c'hellomp diraez a-zivout  
ar Spered, emañ-hi diforc'het ez-doarek diouzh an

hini a bled gant ar Bed rakvoudel. Emañ 'r Spered hag ar Speredelezh ermaez ar randaal a vez enebet enni an Enboud ouzh ar Rakkvoud, ar Boutin ouzh ar Brevezenn; ar Rummad.ouzh an hinienn; rak diwar rakvoudkeat e tiwanas a-ziagent an enebadurioù-se. War anv ar Spered ne c'heller ket lakaat perzhioù a vije bet amprestet digant anaoudegezh ar bed rakvoudel. Anienekaat ar Spered e vije. AR SPERED N'EO TAMM EBET DIAZEZ KEALEK HA HOLLEK AR BED. Fetis, hiniennel, "enboudel" eo ar Spered : EN EM ZISKUILHAN 'RA EN BEZANS AN HINIENN, KEN FETIS KEN HOLLEK AN NEUZ ANEZHAN. N'emañ ket an Holleg fetis en ur c'helc'h kealek ha difetis ; nag e rummvoud ar C'healiou ; emañ, er c'hontrol, er vezafs hiniennel a seller outi en he leunañ, en he doare uhelañ. Da vezout ar Spered e ranker arvestiñ outañ gant daoulegad ar personelour. Hogen,mar seller outi e-kefvez ar vezafs, emañ 'r bersonelezh en ur c'helc'h diforc'het a-grenn diouzh ar c'helc'h ma vez enebet ennañ ar Boutin ouzh ar Brevezenn, an Holleg ouzh an Hinienn. Dieil, hiniennel, unan, dishelfvel diouzh ar peurrest eus ar bed eo ar bersonelezh; MET DIWARBOUEZ A ZO ENNI, EZ EO HOLLEK HA GOUEST DA VRIATA AR BED A-BEZH DRE AR GARANTEZ HAG AN ANAOUDEGEZH; AZE HEPKEN E C'HELL TARZHAN BUHEZ AR SPERED; n'eus tu erbet e tarzhe hounnezh (buhez ar Spered) diwar un all a ziazez kealek ha hollek. AR SPERED HINIENNEL NE ZEVEZ KET EUS AN HOLLEGOU, NAG EUS AR BED KEALEK : EMSKED DOUE EZ EO, da lavarout eo : EMSKED UR SPERED HINIENNEL.

Ar Spered hag ar Speredelezh, daoust ma 'z eo ermaez ar Rummvoud ez eus anezho, bez'e c'hellont kaout levezon war henned. Diazezañ ar Spered war an Hollegoù, „nac'hañ 'r Frankiz e vije, e-ekor d'ur Rediouriezh bennak, hag unan livnet e ve. Ar Spered ne c'hell ket bazañ rakdoareet, ha pa vije gant ur bed a Gealiou, e ster platoniat al lavar. Da venoziañ 'r Spered e c'hell Mabden - e-touez hentoù all a zo d'hen ober - e empenañ 'vel un analadenn, 'vel un enc'hwec'h doueel ; pezh a zo dishelfvel a-grenn diouzh ar Rakdoareadur a weler gant an Hollegouriezh vaizel. P'emañ,dres, e-kreiz an oberiantiz speredelese, neuze ez eo dishual Mabden;peogwir ne deo rediet na gant rakdoareerezh an Anien hag ar Gevredigezh, na zoken gant Rakdoareadur an Hollegouriezh vaizel : rak ne deo ket kenlodek e rakdoareidigezh anienel, kevredel ha meizel ar Rummvoud. Gouez da Hegel, e talvez "Frankiz" kement ha "bezañ ar gêr". Hogen, UN DISTRO HOLLBAD DAVEDOR AN UNAN EO AR SPERED. Ne vezn penaos, er menoziañ ar Spered evel-hen n'eus unvezhouriezh erbet, daoust ma 'z eo bet kammgereret ar menoziadur-se evit an unvezhouriezh, meur e-vezh e-hed istor ar meizerezh, ha gant Hegel zoken. En enep e c'hellomp lavarout : BEZANS AR SPERED A ZISKOUEZ EZ EUS DAQUEGEZH A-ZIAGENT. Met keal erbet eus an daouegezh o tigemañ Doue digant Mabden, ar C'hrouer digant ar C'hrouadur. Keal a zo eus an daouegezh oc'h enebiñ an Enboud ouzh ar Rakkvoud, ar Frankiz ouzh ar Rakdoareañ, ar Spered ouzh an Anien, an Hinienn ouzh ar Boutin.

Ne c'heller ket disklaeriañ ar Spered adalek an Hollegoù savet diwar rakvoudekaat. E vit Mabden e talvez "Spered" kement hag en em zivac'hañ diouzh an digenvez da vont etrezek an Holleg fetis. PERSONEL EO AR SPERED. En em ziskuilhañ 'ra er person. Gantañ avat e vez lakaet un endalc'h dreist-personel da leuniañ ar person. ENBOUDEL EO AR SPERED : en em ziskuilhañ 'ra en Enboud; met hon diwall a ra diouzh an "Enboudelezh" fall, diouzh an divarregezh a vvir ouzhimp a zigemmañ ar gwirvoudennoù an eil re diouzh ar re all. A zo gwelloc'h : en em unanif a ra d'ar gwirvoudennoù. Gwirvoudegezh ar Spered a dalvez ivez kement hag en em dreif ouzh ar gwirvoudennoù. Gwelour eo ar Spered. Gantañ e vez gwelet ar gwirvoudennoù. Gantañ e vez merzet gwirvoudennoù ar Bed speredel, koulz ha gwirvoudennoù ar Bed rakvoudekaat, aniel, enevel, istorel ha kevredel. Met setu ARDUEZ PENNAN AR BED SPERED : ENNAN N'EUS LEC'H EBET D'AR RUMMADELEZH, D'AR STROLLER, D'AN TOLZENNADOU - ennañ 'vat emañ'n hiniennelezh hag ar bersonelezh kevanvez gant ar Fetis hag an Holleg. ROUANTELEZH AR SPERED - a ziskouez kement-se - A ZO ANEZHI ROUANTELEZH AR GARANTEZ HAG AR FRANKIZ. A-douez an holl wirvoudennoù, an hini wiriskañ eo ar Spered, dre ma 'z eo gwirvoudekoc'h an hinienn hag an Enboud eget ar Rakvoud. Pa ne anzaver da Vezant nemet pezh a glot gant hollsturiennoù ar reiz, ne deo ket ar Bezant e kroger, met an Heviz hepuiken. Ne deo ket evelse e c'heller merzout gwirvoudegezh ar Spered. N'emañ ket ar Spered - ar Gwirvoud speredel - diouzh hollsturiennoù ar Poell; klotañ gant ar Bed hollek ha gant ar Bed rakvoudekaat ne ra ket. Emañ Bed ar Spered diouzh buhez diabarzh ha fetis Mabden; kevran eo en

tonkadurioù bevet gant hennezh : er garantez; er marv, er reuziegezh denel ponn-da-benn. Ma speredeler ar Spered, e ranker anzav ez eo disheñvel gwirvoudegezh ar Spered diouzh kement a zo bet rakvoudekaat e kelc'h ar Meizerezh hag an Anian. Dianavez eo ar Spered oberiant d'ar Speredelouriezh ha d'ar Gealouriezh difetis; rak disrannañ 'reont ar Spered diouzh ar Vuhez an ha leunañ, d'a lakaat en ur C'helc'h "kealek".

Ne c'heller ket menoziañ 'r Spered en ur vont gant ar Vuhezalouriezh. Lavarout a c'heller : "Buhez eo Spered", gant ma ne vo ket menoziet ar vuhez er mod bevoniezhel. Tennañ 'ra 'r Spered da gelc'h ar Vezafs. Ar pezh a zo : gwirvoudegezhioù dezho pep a gelc'h : gwirvoudegezh ar bed korfal, organek, enevel ha kevredel - ha diouzh an tu all, gwirvoudegezh ar Wirionez, ar Mad, ar Genad, an Talvoud, an Imbrouderezh-krouiñ. Ouzh ar Spered, ouzh ar Gwirvoud speredel eo staget an eil rummad-gwirvoudegezhioù-se. Ar Wirionez ne deo ket gwirvoudek evel m'eo gwirvoudek anien un diavaez-tre; gwirvoudek eo e-giz ar Spered, e-giz ar speredelezh e vezafs Mabden. Meiz klok Mabden a zo anezhañ ar Spered, tamm erbet ar poell poellataer, ar meizerezh difetis. Speredel eo, gantañ e vez trabarzh ar vezafs hac'h unan. An elfenn speredel - dres evel ma'z eus anezhi en Mabden - emañ-hi dreist hag en tu-hont d'ar Bed. Enboud eo ar Spered, keit ha ma vez anebet an Enboud ouzh an Dra. Se a zo bet komprenet met gant Fichte. A-dreuz Mabden e tiogel ar Spered e Wirvoudegezh. Diskuliadur ar Spered eo Mabden. Ar Spered oc'h en

em ziskuilhañ eo an Askre, an Emskiant. An Askre a  
zo anezhi estr eget ur menoziad enevoniezhel : enni  
'z eus un elfenn oc'h aozañ traoù, speredel hec'h  
anien. Evel-se en em zigor an ode da vont eus an Em-  
skiant d'ar Gouremskiant. AR GOUREMSKIANT O LABOURAT  
EN EMSKIANT EO AR SPERED. ARACK AR BOUD EMAN 'R  
SPERED.

ooo  
o

mmm mmm mmm mmm mmm mmm  
 mm m mm m mm mm mm mm  
 mm m mm m mm mm m mm m  
 mm m mm m mm mm m mm m  
 mm m mm m mm mm m mm m  
 mmm mmm mmm mm m mmm mmm  
 mm mm m mm mm m mm mm  
 mm mm m mm mm m mm m  
 mm mm m mmm mm mmm mm m

Komanant 1961, 12 niverenn..... 36 NF  
 Komanant 1961 d'ar Geriadur Istorel hepken,  
 (4 niverenn)..... 12 NF  
 Komanant 1961 hep ar Geriadur Istorel,  
 (8 niverenn)..... 24 NF

Dr ETIENNE, Châteaulin, CCP. 16.093-13 Paris

Liesskrivet e ti

Herve AR MEE, 32 str. Tad Bourdon, Roazhon  
 CPPP Nn 35.709

Diskleriet hervez lezenn, Pevare trimiziad 1961

Priz ar c'haier-mañ : 4,00 NF

